

AN EUR ZANTEL

..... EN TI

E DOUG AN NOZ



FB
248.
3
CRA



*O c'houi holl a dremen dre an
hent, sellit ha gwelit ma' z eus eun
anken par d'am hini.*

Thre I. 12.

64753

AN EUR ZANTEL

=== EN TI ===

E DOUG AN NOZ

Gand an Tad Mateo Crawley-Boevey

eüz Urz Ar C'halonou Sakr (Picpus)



« Va ene a zo trist beteg ar maro... »

« Ho pezet truez ouzin, c'houi, da vihana, va
« mignoned.

« Beilhit ha pedit... »



Église catholique
en Finistère

Document numérisé en 2023



Nihil obstat:
Jean-Ronan GUÉGUEN,
Chanoine titulaire, Censeur.
Quimper, 3 mai 1932.

Imprimatur:
Quimper, le 27 mai 1932.
P. JONCOUR, v. g.

Lennit an dra-man

A-raok staga

Adori Doue a zo e anaout evid an Hini a zo mestr, war bep tra, ha n'en deus e-unan mestr ebet.

E pep lec'h e tleer adori Doue, met ret eo hen ober, dreist-holl e goueled hon tiez hag e goueled hon ilizou.

An holl gristenien vat a oar petra eo adori e goueled an ilizou; aman ne gomzimp ket eus an adoration-ze; aman ne gomzimp nemet diwarbenn ar c'hiz kaer a en em skign, a-nevez 'zo, eus an eil penn d'egile d'ar bed kristen, da adori Doue ivez, e goueled an tiez, e tal an oaled, e doug an noz, epad eun eur, eur wech er miz, ha d'e zigoll evelse, eus an dismegans a daol warnan pec'hejou holl dud an ti. Evelse eo e vez anavezet Hor Zalver Jezuz-Krist evel penn an tiegez hag e teuer, a-nebeudou, ha ne raer ennan netra ha ne vefe ket hervez youl e galon zakr.

A bep tu e c'houlenner ouzomp eul leorig da lenn epad an eur adoration-noz-ze a raer, e-tal an oaled, en tiegeziou kristen; ar gwel eus an diskar a zo deuet ne lavaran ket hebken er gristenien glouar, met zoken er gristenien virvidik

eo hon doug d'her skriva ; skrija a reomp pa welomp pegement e tec'h ar gristenien diwar hent ar baradoz. dre o c'homzou, o oberou, ha kristenezed a zo, dre o gwiskamanchou.

Kristenien a zo, breman, hag a vev evel ma ne vefe Doue ebet, na gourc'hemenn Doue ebet, na Pab ebet e penn an Iliz hag e vefe ret senti outan evit chom war hent ar baradoz.

Hor Zalver Jezuz-krist a zo rannet e galon o welet ar gristenien-ze o veva, evel ma vevont, i hag a oa, dre wir, da veza da dosta d'ezan, i hag e oa dleet d'ezo beza bet e vrasa mignoned hag e wella ebestell..

Ra deuio al leorig-man d'o lakat da ziskenn enno o-unan, ma tigollint an Aotrou Doue, araok ma vezo re zivezat rak skei a ray, koulskoude, ma ne c'houlennomp pardon ebet digantan ha ma ne zigasomp gwellaenn ebet ennomp.

Eur mor a vreinaadurez a venn goueledi an tiegeziou kristen : doriou an tiegeziou a dlefe beza o rei an ton er vro, ne vezont ket prenet ouz an hudumnez; ar mammou, eleiz anezo, a ra evel ma ne vije badiziant ebet war o zal ; c'hoarzin a reont pa glevont ar Pab, an Eskibien hag ar veleien o stlepel o malloz war an dansou hudur hag ar gwiskamanchou diskempenn.

Arabad beza souezet goudeze, ma kaver, tu ha tu, merc'hed yaouank o tont da veza ker skanv-benn ma lakeont an Itron Varia da ouela o welet

lili kurunenn o glanded o koueza er fank... Kristenet e oant bet, met eus o badiziant n'o deus miret netra nemed ar berad deour meur a oa bet skuilhet war o fenn ; ar peurrest ma n'eo ket eun druez, a zo bet laeret d'Hor Zalver Jezuz-krist.

Pedomp, digollomp ha greomp pinijenn... rak seul tostoc'h eo ar walenn a gastiz ma oar gwelloc'h ar bec'herien-ze emaint oc'h ober an droug.

Ra deuio an islonk a vadelez a zo e kalon Jezuz da leuna an islonk a bec'hejou a zo enn hor c'halonou-ni. *Parce Domine!*

Kemennadurez

An eur adoration-man a zo eta eun eur adoration hag a zo da ober, en noz, eur wech ar miz, e pep tiegez.

Ma 'z eus da nebeuta seiz den en tiegez ha ma c'hoanta ha ma c'hell pep hini anezo ober o eur adoration, adalek dek eur diouz an noz betek pemp eur diouz ar beure, e vezo gellet hen ober, gant muioc'h a lid, en eur zal vihan, dirak skeudenn pe daolen ar Galon Zakr a vezo renket, braoa ma vezo gellet, glazvez, bleuniou ha goulou en dro dezi.

Ma n'eus nemed eun den hebken, en eun tiegez, oc'h ober e adorasion, e c'hello hen ober, en e gampr heb direnka den all.

Alia a reer an dud da vont, war bennou o daoulin, pa vezont o staga gand o eur koulz ha pa vezont o vont d'he c'hloza ; evelse e reont eun tammig pinijenn.

En em lakat a raer a-spered dirak ar Zakramant meulet ra vezo, a zo o chom war aoter an iliz-parrez; e garantez evid an dud eo hen dalc'h eno noz-deiz ; gedal a ra pedennou c'houek e wir vignoned.

Mat eo ivez kaout eur groaz etre an daouarn, e c'hellfed pokat d'ezi, beb an amzer ha chom da zelaou warni klemmou kalon Jezuz.

Lakit en ho spered emaoc'h e liorz Jetsemani, e tal Hor zalver o tiwaska e boanio skrijus ; daerou gwad a gouez eus e zaoulagad benniget; noz du eo; an holl a gousk, zoken e ebestel, nemet... Judas... hag e enebourien; ar re-ze a zo war zav; ar gasoni a zo en o c'halon o dalc'h dihun.

C'houi, chomit ivez dihun, pe'o gwir e karit Hor Zalver.

Lennit gouestad ar pezh a lennoc'h ; chomit da boueza war ar pedennou a reoc'h ; ehanit, beb an amzer, da bedi ha da brederia, ha tennit eus ho kalon hoc'h unan komzou a geuz hag a c'hlae'har, komzou hag a roio da c'houzout d'an

Aotrou Doue e vennit labourat startoc'h eget biskoaz da astenn e rouantelez war an douar.

Kemerit lec'h an Ael a ziskennas da gaout Jezuz e liorz Jetsemani; evel dan sec'hit e zaelou ; frealzit e galon; skanvañt e dristidigez.

Pignit gant Mamm Doue war lein Menez Kalvar; gwelit ha bez ez eus eur c'hlae'har par d'he hini, hi hag he deus gwelet pegement en deus gouzanvet he mab evit gwalc'hi pec'hejou an dud hag a wel atao ar pec'hed oc'h ober e reuz gwasoc'h gwas dre ar bed.

An eur venniget-man a dremenoc'h gant Hor Zalver, evit diskouez d'ezan ho keuz d'ho pec'hejou hag ho karantez, Hor Zalver e-unan eo en deus he goulennet ouz santez Mac'harit-Mari.

Evel ar plac'h eur-ze a welas a-dost kalon Mab Doue, chomit eun eur gant Roue ar Rouaned, dastumit e zaelou, ha laouenañt e galon.

Eneou kristen hag a fell d'eoc'h dic'haoui an Aotrou Doue eus ar boan a ra d'ezan pec'hejou an dud hoc'h eur diweza a vezo skanv; ar Roue bras ivez neuze a deus d'e dro d'ho tiboania; ne raio ket a skouarn vouzar pa glevo ho klemmou; p'en em gavoc'h war ho tremenvan e tirdo d'hoc'h harpa. Etre e zivrec'h ha war e galon goullet eo e varv e vignoned, e ebestel, ar re holl o deus selaouet e galon o tridal ha klasaket laouenaat ar galon-ze gand o euriou adorasionnoz... Eno, pa varvoc'h eo e kavoc'h ho Paradozt

**An cur zantel e tal an aoled e
doug an noz**

Prederennou ha pedennou

Eun dervez, a-greiz m'edo o lavaret he fedennou diouz ar beure, santez Mac'harit-Mari a glevas mouez truezus unan bennak ouz he gervel... Jezuz eo a oa o skei war dor he c'halon hag o c'houlenn digor da vont enni, ken doaniet e oa bet gand an dismegans a daole warnan pec'hejou edod o paouez ober...

Leun-wad e oa hag e c'houlenne he skoazell; c'hoant en devoa da ziskuiza en he c'halon ha da veza laouenaet gand e zervicherez vat... Daoulinet, dem-goude, ouz an daol zantel, ar zantez, leun a deneredigez evit he Mestr, a ginnigas d'ezan he c'harantez evid e zigoll; ha Jezuz, gand anaoudegez vat a en em daolas en he c'halon garantezus, evel eun den

gwall-c'houliet hag a en em ro da gousket eur wech ma vez bet louzaouet.

Ene karantezus, emañ hizio aman, e lec'h Mac'harit-Mari, ar zantez vras e komzas Hor Zalver Jezuz-Krist outi, meur a wech, e Paray-le-Monial. Gloar Hor Zalver a zo en em astennet, met Satan a glask dispenn e rouantelez ha miret ouz ar poblou da heulia e c'houre'hemennou...

E enebour touet eo, ha klask a ra lakat ar bed-holl da drei kein d'ezan. Gellet en deus zoken en em zila e sperejou kristenien a zo evit javedata hor Mestr meulet ra vezo; her skourjeza a ra, a-nevez 'zo, dreist holl, en eun doare skrijus; eus begou e dreid betek kern e benn, Hor Zalver n'eo nemed eur gouli hag eua ar gwad o redek anezan dalc'h mat.

Setu Hen o skei war dor da ene... krena a ra gand ar riu; naon en deus; e zaoulagad a zo karget a zaerou; e zae a zo roget ha dispennet; gouli e galon a zo digoret a-nevez... gant mignoned dianaoudek! Skei a ra war dor da galon evit goulenn truez evid an dud kablus; goulenn a ra ouz e garout evel ma n'eo ket karet e nep lec'h all...

Hervez e justis e tlefe kastiza ha teurel e tan an ifern e vugale dinatur, a vev evel ma ne vije bet badiziant ebet biskoaz war o zal, a dorr e lezenn hag a vres e wad dindan o zreid.

Met Hen eo Jezuz! Hen eo ar Zalver... hag e galon a fell d'ezi ren ha trec'hi ar bed en eur bardona; met e bardon ne c'hell koueza war ar bec'herien, nemet digollet e vefe a-raok eus an dismegans a zo bet graet warnan gand ar pec'hed. Evit kaout an digoll-ze eo e teu da vedout ha ma kav en da galon ar pezh a glask e c'hell espenn e-leiz a bec'herien ha rei dezo e bardon trugarezus... Pebez enor evidout, ene karantezus; savetei a c'helles, en noz-man, eneou hag a vije bet kouezet en ifern hebdout, hag heb an digoll a ginniges da Zoue en o lec'h! Pebez kurunenn gaer a roes d'hor Zalver! eur gurunenn eneou eo a laka war e benn, e lec'h eur gurunenn spenn... hag o rei a res d'ezan evid atao.

Hag ar gurunenn-ze ha ne voenvo biken a vezo ive da gurunenn, ene karantezus, te hag a zo da gefridi, ober ar pezh a reas war an douar-man santez Marc'harit-Mari...

(Ha breman, diskennit e goueled ho kalon ha goulennit ouz ar Spered-Santel, en eur la-

varet ar « VENI SANCTE », ar c'hras da ze-laou ha da glevet mouez ar Mestr en e bäsion).

Jezus oc'h en em erbedi ouz an ene : « Ene muiä karet, da drugarekaat a ran da veza kemeret eun eur, war da gousk, da jom ganen, war zav, d'am digoll e lec'h an dud-ze a garan evel ma ran ha n'am c'haront ket; bennoz d'it ha trugarez; va c'halon a zo barr-leun a c'hlaç'har; met diboaniet oun ganez; eün ha leal eo da galon; evit diskouez d'it va anaoudegez vat e livirin d'it ar pezh a dremen e plegou kuzeta vā c'halon... Me, eun Doue, da Zoue, eo a zo o komz ouzit; va ador eta !

Me eo Salver ar Bed; Mab Mari; Jezuz. Selaou, ene karantezus... dont a res, dreist-holl, evit va dic'haoui eus ar pec'hejou am glazas ar muiä... pec'hejou ar vignoned diannaoudek, brasoc'h o fec'hejou eget re ar re all, dre ma ouezont ervat petra reont... ha dre m'am eus bet graet ker brao d'ezo atao ! Met, gand a ri, lavar d'in, da genta, eur ger evid ar re a zo, diouz eur gwel, da vihana, ar bec'herien vrasa, ar re a wall-gomz em eneb hag am gwerz, evel Judas; laka da spered da

ustri, eur pennad, war an dud keiz-se, an d-ze ha n'eus nemeto hepken, er bed-man, gwirionez, hag a vefe reuzeudik dre ma n'ois, na feiz, nag esperans, na karantez...

Mall am eus da gomz d'it eus eur boan all is gwasoc'h, hag eus eun angoni kals doasoc'h... Met gedal a ran, da genta, eur ben-nig a zigoll evid ar re a zo kouezet en iskik ha n'o deus den ebet evid astenn d'ezo n dourn trugarezus. Gra eun akt a garantez o c'henver hag em c'henver... Va c'halon az aou...

An ene karantezus — Kalon Jezuz! Me, frealzi hag ho lakât da vouse'hoarzin a-euz ho taelou!... Me eo a c'halvit da zouplaat oc'h anken estlammus ha da louzaoui ho ouliou euzus... da lemmel an drein eus ho arunenn spenn ha da lakat eneo e lec'h an ein lemm-ze; setu aze eur c'hefridi ha n'em is miritet, e doare ebet, e vije fiziet ennoun. bennoz d'eoc'h, roue a garantez hag a drugaz, bennoz d'eoc'h!

Ha setu aman, toueziet gant ho kwad ha ant daelou ho Mamm, ar bedenn a c'houlenn

nit diganen evit bourrevien ho Kalvar ha bourrevien hoc'h Iliz...

Kalon Jezuz, doaniet betek ar maro, pa deuas Judas an trubard, da bokat d'eoc'h, diskouezit ho trugarez adarre d'eur bern tud o deus, a nevez, ho nac'het hag ho kwerzet evit redek warlerc'h ar grouadurien, ar c'har-gou, an enoriou, an danvez...

Dre zaelou Mari ha dre he zeneridigez, o Roue ar garantez, digasit da di o zad an dud dianket-ze hag o deus keuz d'o fec'hejou!...
Parce Domine!

Kalon Jezuz, doaniet betek ar maro, ha dis-meganset muia ma c'helled e lez Herodez, ha stlejet, evel eun torfetour, eus an eil lez-varn d'eben, truez evit doktored lorc'hus hon am-zer a weler ouz ho parn hag ouz ho kondaoni dre ma ne fell ket d'ezo heulia ho kourc'hemennou; n'eus nemet lorc'hentez, en o spered hag hudurnez en o c'halon.

Dre zaelou Mari ha dre he zeneredigez, o Roue a garantez, digasit da di o zad an dud dianket-ze hag o deus keuz d'o fec'hejou!...
Parce Domine!

Kalon Jezuz, doaniet betek ar maro, staget ouz eur groaz, etre daou laer, dilezet, war ho tremenvan, gand ar re vat ha milliget gand ar re m'edoc'h o tasprena, truez evid ar bec'herien vras a vev, er bed-man, e kreiz an enoriou hag a lounk ar pec'hed evel ma lounk ar pesk an dour... alies, o galloud hag o gloar ne deu dezo nemet goude beza ho kwerzet.

Dre zaelou Mari ha dre he zeneredigez, o Roue a garantez, digasit da di o zad an dud dianket-ze hag o deus keuz d'o fec'hejou!...
Parce Domine.

Jezuz, o va Jezuz, hegarat ha madeleus, unani a ran va fedennou gant re an hini a zalc'h o lec'h, war an douar, Hon Tad Santel ar Pab, evid ar re n'o deus morse hoc'h anavezet, pe hoc'h anavezet ken nebeud ha ker fall hag a zo deuet, hep beza graet an dister dra, evit hoc'h anaout gwelloc'h, da veza hoc'h enebourien touet! *Miserere!*

Jezuz, o va Jezuz, hegarat ha madeleus, ho pedi a ran evid eleiz a boblou troet fall hag a zo bet laket pennadou enno en hoc'h eneb, po-blou ha n'eo ket mad d'ezo senti ken ouz an Iliz a garfent diskar evit ho flastra dindanni!...
Miserere!

Jezuz, o va Jezuz, hegarat ha madelezus, ho pedi a ran, da gaout truez ouz ar re a ra brezel d'eoc'h o c'houzout ervat petra reont, evel ma tlefe ar brezel-ze pouneraat o yalc'h, tud troet ouz an danvez hag a stlap o malloz war ar groaz, hag a villig ivez ho Lezenn dre m'o c'hondaon, hag a garfe ho tiskar diwar an tron ho peus en eneu ha war an aoteriou... *Miserere!*

Jezuz, o va Jezuz, hegarat ha madelezus, ho pedi a ran evit kement hini ho peus gwelet diwar ho kroaz gant ho taoulagad, beuzet en daelou; ho pedi a ran evid ar re holl ho peus bet truez outo, hag ho peus kinniget d'ezo ar pardon war ho tremenvan, pa lavarec'h: « Va zad, o fardonit, rak ne ouezont ket petra reont. »

Jezuz, o va Jezuz, hegarat ha madelezus, ho pedi a ran, hag ar bedenn-ze a c'hedec'h diganen, ho pedi a ran, c'houeka ma c'hellan, evit va zud... ar re holl a dlean karet ennoc'h hag evidoc'h. Ya! evidoc'h, Roue ha Mignon Bethani! O anaout a rit holl; lenn a rit e goueled ar c'halonou ha gouzout a rit ez eus em zi trubuilhou bras ha glac'hariou tenn...

Truez evito, evel m'ho peus bet gwechall ouz ar vignoned ho poa e Bethani.

An eur-man a dle beza eun eur a dremenin eharz ho treid evit ho tigoll eus ar boan o deus graet deoc'h va zud kouls hag eus ar boan am eus graet deoc'h va-unan... Gwelit nag a draou trist, nag a draou dister, nag a draou saotret, nag a draou c'houero a dremen em ziegez. Va zud n'int ket holl deoc'h a-greñn c'hoaz, evel m'ho pefe c'hoant hag evel m'eo dleet e vefent... Kemerit truez outo, c'houi hag a gare kement gwechall ar vignoned ho poa e Bethani, Lazar, Martha ha Mari!...

Digasit gwellaenn enno; roit dezo ar pare; lakit zoken da zavel a varo da veo ar re n'eus buhez kristen ebet, kouls lavaret enno hag a gonsakran d'ho Kalon-Zakr!... Skleraït, krenfaït ha renit an dud-ze. C'houi ar *Sklerijenn*, C'houi an *Nerz*, C'houi ar *Garantez*! Salvit ha santelaït holl dud an ti-man, el lec'h m'ho peus kavet eun ene paour, sur a-walc'h, met eun ene hag en deus youl d'ho kwelet anavezet, karet ha servichet gant kement hini a zo o veva en e zerr; o mignon mat Bethani!... Bezit Roue ha Doue an ti-man!... *Gand ar brasa fizians, displegit aman ezommou tud ho*

ti; gwelit ar grasou a sklerijenn, a garantez hag a nerz-kalon da zougen ar c'hroaziou pem-deziek o deus ezomm ar re a garit.

Hag ho tivrec'h, astennet e kroaz, livirit pemp Pater, pemp Ave Maria ha pemp Gloria Patri, evit paea dle pec'hejou tud ho ti, ha goulennit evito ar grasou kaer en deus promettel d'an tiegeziou kristen el lec'h ma vije enoret ha karet evel m'eo dleet.

Jezuz oc'h en em erbedi ouz an ene. — Mat ez peus graet komz d'in eus ar re a garan kement dre ma 'z int karet ganez; da diegez eo va hini, daoust ma c'hellfed kaout abeg ennan, eun dro bennak. Her benniga a ran; teurel a rin evez warnan; evid an eur noz-man a dremenet e harz va zreid d'am frealzi e skuilhin warnan va fardon ha va bennoz... Eun dervez, er baradoz, e ouezi ar pezh ez peus aczet d'az tiad tud, o chom da veilha ganen en noz, epad amzer ar sioulder, an denvalijenn hag ar pec'hed... Lavar d'in ar poaniou ez peus gant da dud, ha bez dinec'h ha dienkreiz!... met kinnig ivez an eur a zigoll-man evid an tiegeziou m'oun bet kaset kuit anezo dre ar pec'hed ha pebez pec'hed!...

O! nag a ziskar, nag a zismantr, nag a zae-rou a zo en eun niver bras a diegeziou pa ne vezont kristen nemet diwar gorre...

Tud fallakr ha lore'hus, war zigarez digas gwellaenn er bed o deus bruzunet mein-diazez an tiegez... saotret ha torret end-eeun, o deus ereou sakr ar briedelez kristen...

Ar garantez etre priedjou zoken, hag a laka laouenedigez en tiegez, hag eur gurunennad vugale vihan en dro d'an daol, ar garantez-ze hag am eus-me benniget, hag a zo eun dra ker bras ha ker kaer, tud a zo hag o deus bet c'hoant d'he diskar.

Ha n'eo ket an dra-ze hepken; gwel peger skanv-benn eo breman ar re yaouank: n'eus nemed avel en o fenn; ne redont nemet war-lerc'h plijadurioù hag a zo had daelou stag outo. Ene kristen, ped ha kendalc'h da bedi rak keit ha ma kavin eneo mat evel d'out, gouest da garet ar re all betek ober pinijenn evito, e chomin hep skei gand ar bec'herien evel m'eo dleet her grafen.

Ene muia karet, en eur denval-man, ma raer enni kement a bec'hejou, galv d'az sikour

Rouanez Nazareth a oar kemeret he lod eus
va foaniou divent. Da zikour a raio, o stanka
an hent ouz an droug a venn goueledi ar bed,
da ziframma eus a dre va daouarn ar gwal-
nier hag ar gurun a dlee pulluc'ha ar bec'he-
rien; galv da zont war da zikour, an hini he
deus paeet kement a zle evit pec'hejou ar re
all, pried Joseph, Mari Nazareth, ya mamm,
ar Werc'hez zinamm...

An ene karantezus — Mari, steredenn-
vor, deuit d'hor sikour, saveteit labour ho
Mab Jezuz, rak Nazareth, da lavaret eo an tie-
gez kristen a zo warnez koueza en e boull!
Mamm Doue, pa vezo lavaret mat, n'eus ne-
medoc'h ken hag a vefe gouest d'hor savetei!

Mamm oc'h ha Rouanez oc'h ivez; tron ho
mab eo a glasker diskar... ar mammou kristen,
me lavar ar gwir mammou kristen, mar d'int
bet stank gwechall, a zo rouez a-walc'h bre-
man... An tiegeziou o veza ma n'int ket kris-
ten ken, a zo o vont da goueza en o foull...
Mamm Doue, hor saveteit.

En tiegeziou, dizale, ne vezo gwelet buhez
ebet ken o vleunia: na buhez Doue, na buhez

den! rak niverus eo ar gwrazez hag a ra fae
war an enor da gaout bugale... Mamm Doue,
hor saveteit!

Ha gwasas pezh a zo, ar re yaouank hag a
dfe beza bleun an amzer da zont n'int mui
henvel ouz bleun; eun avel fall he deus o
suilhet betek o c'halonenn; Mamm Doue, hor
saveteit!

Hag ar vugale vihan hag a zigor o diskouarn
tano hag a glev traou ha n'eo ket dleet d'ezo
klevet hag a zigor o daoulagad lemm hag a wel
traou ha n'eo ket dleet d'ezo gwelet, ar vugale
geiz-ze, siouaz, n'eo ket bugale int ken!...
Mamm Doue hor saveteit!

Rouanez ar verzerien, Itron Varia a Druéz,
gouzout a rit pegen doun eo gouliou an
eneou n'eus nemet Jezuz ha c'houi o c'hou-
zout ervat pebez tra vras eo ar pec'hed... dre
ho taelou, dre ar seiz kleze a dreuzas ho ka-
lon war menez Kalvar, dre hirvoudou hag
huanadou Jezuz, dre e Angoni hag hoc'h hi-
ni, deuit buan, Mamm a Drugarez, saveteit
an tiegeziou kristen, rak int-i eo mein-
diaz rouantelez ho Mab !...

Bezit adarre Rouanez tiegeziou ar gristenien ; ra vezo klevet enno c'houez vat ho vertuziou ; c'houi eo lilienn ar baradoz ; ra vezo klevet c'houez al lili ha c'houez ar c'hlanded en hon tiegeziou evel gwechall e Nazareth hag e Bethani, ha bezit eur wech all c'hoaz, o c'houi hag a gar kement paeadle ar bec'herien, « *vita, dulcedo, spes nostra* ».

Mari, saveteit an tiegez da Jezuz
Jezuz saveteit an tiegez dre Vari.

*Libirit aman eur SALVE REGINA evit
goulenn ma vezo Jezuz roue en tiegeziou.*

Jezuz oc'h en em erbedi ouz an ene. — Ene kristen, selaou aman gannen ha laka evez ouz va c'homzou rak eun dra vras am eus da fiziout ennout ha ne vez ket komprenet gand ar re n'int ket kristenien penn-kil-ha-troad... En em erbed da genta ouz va Mamm; lavar, a greiz kalon: « Me ho salud, Mari », ma c'hello va c'homzou mont doun en da spered. *Me ho salud, Mari.*

Lavar d'in, daoust ha karout a res gant doujans ha devosion, Hon Tad Santel ar Pab, va vikel a zo, du-hont, e Rom ! daoust ha

sonjet ez peus ez eo ar Pab, kaera tra a c'helle rei d'it va c'halon ha va zeneredigez, goude ar Werc'hez Vari, va Mamm ?

Dre va mamm zinamm ez oun en em roet d'an dud ; dre c'henou ar Pab e skignan dre ar bed va urziou ; hen eo va mouez ; testeni burzudus va c'harantez ; embanner bras va gourc'hemennou.

Hen eo va brec'h, va galloud war an douar
« betek penn diveza ar bed ! »

Va c'halon am eus fiziet ennan ; en e hini eman... Tad eo ha Mestr eo ivez !

Spered Doue a zo warnan ha va Mamm, evel er gampr-lid gwechall, he deus he gefridi da ober e kichen ar Pab.

Ma tavan er Tabernakl, e komzan er Vatikan : me eo a zo en eil lec'h hag egile hag atao oun Aotrou hag atao oun Roue.

O ! glac'har ! bras eo niver bugale an Iliz a ra poan d'in en eur ober poan dezan.

Me eo a vez flemmet gand an teodou abegus a gav abeg ennan.

Me eo a vez dismaganset pa ne raer ket outan e lavarou ; rak hen eo an teod, met me eo ar vouez ; gwasoc'h a zo : a-wechou e klasker trabas outan hag o klasker trabas outan e klasker trabas ouzin.....

O ! nag a eneo a zo hag a en em gollo, gwazed ha merc'hed, stlejet gand eur barravel-ifern hag a en em zaono evid atao, dre ma tizentont ouz an hini am eus karget da liamma ha da ziliamma ; evit kentelia ha sturia ; evit gourc'hemenn ha difenn. Pep galloud a zo etre e zaouarn ha den ne laka e dreid war dreujou ar baradoz ma ne c'heller ket gwelet war e dal merk e vennoz.....

Ene karantezus, nag a eneo a zo war hent an ifern, dre ma tizentont ouz Per !

Sell ouz ar merc'hed-ze a zo bet kondaonet gantan o giziou divalo hag a gendalc'h da heulia o froudennou direiz ; kristenezed vat int, war o meno. Daoust ha red e vezo o milliga ?

Hag, aman, ar wazed-man hag o deus c'hoant da ober o mistri d'ar re all ha da lakat da dalvezout eur c'halloud ha n'em eus

roet nemet d'ar Pab... Daoust ha red e vezo o milliga ?

Ha nag a dud all, kristenien start, war o meno, a zibab, etouez komzou ar Pab ar re a blij d'ezo, a dro, e gelennadurez hag a zo ker skler ha dour-stivell, en eun hevelep doare, ma kredont dizenti outan hep pec'hi : gwall-c'hlazet e vezan ganto.

O ! ma oufes, ene karantezus, pegement a daoliou garo em bevez diganto.

Ene muia karet, laka an eneo da jom azav war an hent risklus-ze ; n'eus hent ebet danjerusoc'h egetan ; dre ar pedennou hag ar piniennou a ri e lec'h an dud-ze, e roi d'in al levenez da welet ar Pab karet ha doujet gand an holl, evel eun tad, bugale sentus ha karantezus en dro dezan. Ar re her c'har a ra d'in enor ha levenez !

An ene karantezus — Mil bennoz d'eoc'h, Aotrou, evid ar gentel bouezus ha kaer ho peus roet d'in ; bennoz evid ar c'homzou ho peus lavaret diwarbenn an hini a zalc'h ho plas war an douar.... Va lezit da

lavarout eun dra d'eoc'h, Roue a garantez :
ma 'm eus ho klazet, me ivez, ma n'em eus
ket karet ha doujet a-walc'h ho Vikel, ma
n'em eus ket sentet atao outan, evel ma vi-
je bet dleet d'in hen ober, e c'houlenan mil
bardon ouzoc'h !...

Hag evit louzaoui ar gouli-ze..... evit sec'ha
ho taelou hag ar fank strinket ouz ho penn
santel ma 'z eo ar Pab, me a fell d'in, a greiz
kalon, beza eun darn hosti, kinniget holl da
greski ho kloar, evid ar Pab.

Rouanez dinamm an Iliz, dre ho kalon a
vamm, e kinnigan da Jezuz va holl foaniou :
re ar spered, re ar galon, re ar c'horf, evit
rapari ar pec'hejou a zizentidigez a-eneb
Hon Tad Santel ar Pab. Pardon evid ar
pec'hejou-ze ; sklerijenn ha trugarez evid an
dud kablus !....

Rouanez dinamm an Iliz, dre ho kalon a
vamm, e kinnigan va oferennou evit rapari
an difizians a ziskouez darn e kenver Tad
an holl gristenien. Pardon evid ar pec'hed-
ze; sklerijenn ha trugarez evid an dud ka-
blus !....

Rouanez dinamm an Iliz, dre ho kalon a
vamm, e kinnigan va c'hommunionou, a rin
birvidika ma c'hellin, evit rapari pec'hejou
an teodou abegus a vez dalc'h-mat o tispenn
ar Pab.....

Pardon evid ar pec'hejou-ze ; sklerijenn
ha trugarez evid an dud kablus !...

Bennoz deoc'h, kalon Jezuz da veza roet
deomp Hon Tad Santel ar Pab :

En hano an eneou a gerz war hent ho
kourc'hemennou, en hano eleiz a re all, ne
anavezont ket, pe a anavez fall, ar vad ho
peus graet d'ar bed o rei d'ezan ar Pab, m'ho
trugareka, me ho meul gant holl verzerien ar
feiz kristen.... gand an ebestel hag ar re holl
o deus stourmied hag o deus trec'het, e skeud
ar Groaz, o senti ouz ar Pab a zo e Rom...

C'houi, dreist-holl, Santez Tereza ar Ma-
big Jezuz, selaouit va fedenn ; karet ho peus
an Iliz hag ar Pab, en em ginnig ho peus
graet da Jezuz evit ma kresko galloud an
Iliz ; digasit en dro an dud dianket : Hen eo
o Zad, Hen eo o Pastor, Hen eo « ar C'hrist
hegarat a c'heller gwelet war an douar ».

Santez Tereza ar Mabig Jezuz, grit ma vezo trec'h an Iliz d'he enebourien, ha fuilhit war ar Pab kaera roz ar baradoz !

(Livirit eur SALVE REGINA evid H. T. S. ar Pab ; roit ho ker e pedoc'h evitan bemdez, her c'haroc'h hag e sentoc'h outan evel ma sent eur bugel ouz e dad, rak kalon ar Pab eo kalon ar C'hrist).

Lennit gouestad ; pouezit war ar geriou, evel ma rafec'h m'o c'hlevjec'h o tont eus genou Jezuz toueziet gand e hirvoudou.

Jezus oc'h en em erbedi ouz an ene. — Ene muia karet, n'eo ket hepen Pilat ha Pennou bras ar Juzevien eo o deus va staget ouz ar groaz... Ar bed eo her greas kouls hag i, hag a-wechou muioc'h.... A ! setu perag em eus lavaret : « Ne bedan ket evid ar bed » Ya ! ya ! her milliget em eus.

A ! ma ouesfes pegen doanius e kavan gwelet eun niver bras eus va bugale, hag am eus graet kement a stad d'ezo, o trei kein d'in, siouaz, evit heulia bugale ar bed.

D'it hel lavaran : krisoc'h eget dismegans an den digredenn e kavan an dra-ze ; Ya ! glazet e vezan betek goueled va c'halon pa welan tud hag am eus karet kement o tistaga o c'halon diouzin, ouz her ranna etrezon hag ar bed milliget....

Pok, ene karantezus, gant teneredigez ha glac'har d'am Pemp Gouli ha lavar o terc'hel va c'hroaz etre da zaouarn : « Truez ! Kalon Jezuz, Truez ! M'ho kar, va Aotrou ha va Roue, e lec'h an dud-ze hag a ziskouez beza ken dianaoudek en ho kenver ha toui a ran ho tigollin diouz o dizentidigez o terc'hel da vale, va unan, startoc'h eget biskoaz war hent ho kourc'hemennou.....

Ho Rouantelez deuet d'eomp !

Jezus. — Ene karantezus, klev va hirvoudou ; gortoz ma tiskleriin d'it va foaniou estlammus... Divec'hia 'rin va c'halon ouz he diskarga en da hini....

Ha ne weles ket, a-bell, an dud skanv-benn o fringal, evel eur berniad merien ?.... C'hoarzin a reont; youc'hal a reont; doare

o deus da veza laouen ; n'int laouen nemet diwar c'horre..... tan an evachou krenv a gresk tan an youlou fall..... hag alies a-walc'h raktal da heul an euriad plijadur vrein en devoa kemeret e krog er pec'her tan an ifern a bado da viken.

O ! te, da vihanan, gouel ganen war o follentez ha gra, evid ar gwella, da rapari an droug a reont.

Pok, ene karantezus, gant teneredigez ha glac'har d'am Pemp Gouli ha lavar, o terc'hel va c'hroaz etre da zaouarn : « Truez ! Kalon Jezuz, Truez ! M'ho kar, va Aotrou ha va Roue, e lec'h an dud-ze hag a ziskouez beza ken dianaoudek en ho kenver, ha toui a ran ho tigollin diouz o dizentidigez o terc'hel da vale, va-unan, startoc'h eget biskoaz, war hent ho kourc'hemennou....

Ho Rouantelez deuet d'eomp !

Jezuz. — Sell ouz tud ar bed, kristenien vat war o meno, va mignoned, emezo, hag a red gant terzienn ar gwall-dechou warzu ar plijadurioù difennet... Saotri o deus graet

o izili, i hag a oa bet konsakret o c'horfou gand ar Vadiziant ha Sakramant an Aoter... Gwel, na pebez krisder a lakeont da zigeri va gouliou...

Te, da vihanan, ene karantezus, gouel ganen war o follentez ha gra, evid ar gwella, da rapari an droug a reont.

Pok, ene karantezus, gant teneredigez ha glac'har d'am Pemp Gouli ha lavar o terc'hel va c'hroaz etre da zaouarn : « Truez ! Kalon Jezuz, Truez ! M'ho kar, va Aotrou ha va Roue, e lec'h an dud-ze hag a ziskouez beza ken dianaoudek en ho kenver ha toui a ran ho tigollin diouz o dizentidigez o terc'hel da vale, va-unan, startoc'h eget biskoaz, war hent ho kourc'hemennou...

Ho Rouantelez deuet d'eomp.

Jezus. — Sell breman, a-bell, a-dreuz da zaelou, en aoun d'en em stlabeza, ouz ar saliou-teatr hag ar saliou-dans... a-c'hiz nevez...

E Rom, gwechall, en amzer ar bayaned e weled traou evelse ivez ; met aman, ar re a

zarempred an tiez hag a lavar n'int ket evit tremen hepdo, a zo kristenien, hag o deus kommunit, meur a wech; va bugale int.

An tiez-ze eo tiez an hudurnez ha dies eo lakat an treid enno heb en em zaotri...

Te, da vihanan, ene karantezus, gouel ganen war o follentez ha gra, evid ar gwella, da rapari an droug a reont.

Pok, ene karantezus, gant teneredigez ha glac'har d'am Pemp Gouli, ha lavar, o terc'hel va c'hroaz etre da zaouarn: « Truez! Kalon Jezuz, Truez! M'ho kar, va Aotrou ha va Roue, e lec'h an dud-ze hag a ziskouez beza ken dianaoudek en ho kenver ha toui a ran ho tigollin diouz o dizentidigez o terc'hel da vale, va-unan, startoc'h eget biskoaz, war hent ho kourc'hemennou.

Ho Rouantelez deuet d'comp!...

Jezuz. — Ranna a ra va c'halon gand ar c'hlaç'har.

Sell ouz ar merc'hed badezet hag e vije

dleet d'ezo bale war roudou va mamm, ar Werc'hez Zinamm; divezet int; distro diwar-no da zaoulagad rak gwella ma 'z int eo da hada pec'hejou, dre ma 'z eont, dre o gizioù diskempenn; va skourjeza a reont beteg ar gwad!

An hudurnez a en em skign dre holl, ha me a vez goapaet ha dismeganset dre ma 'z eus merc'hed, « merc'hed kristen », war o meno, hag a zo gwelloc'h ganto dilhad kaer, ha skanvadurez kent eget plega d'ar furnez!

Kemer truez ouzin, rak en teatr ha war an aochou, er saliou-dans ha war ar plasennou, va gwad a red a-radenn dindan taolioù skour-jez daouarn flour ar merc'hed kristen-ze a weler o vousec'hoarzin, e kreiz o dizursiou, en dre ma tispennont va c'horf paour a-dammou! Te, da vihanan, ene karantezus, pella diouzin ar c'halur-ze c'houerfoc'h eget ar maro.

O! te, da vihanan, gouel ganen war o follentez ha gra, evid ar gwella, da rapari an droug a reont.

Doaniet oun ha va anken a zo gwasoc'h eget hini va fasion.

Pok, ene karantezus, gant teneredigez ha glac'har d'am Pemp Gouli ha lavar o terc'hel va c'hroaz etre da zaouarn: « Truez, Kalon Jezuz, Truez! m'ho kar, va Aotrou ha va Roue, e lec'h an dud-ze hag a ziskouez beza ken dia-naoudek en ho kenver ha toui a ran ho tigo-lin diouz o dizentidigez, o terc'hel da vale, va-unan, startoc'h eget biskoaz, war hent ho kour-c'hemennou.

Ho Rouantelez deuet d'eomp.

Paourkaez Jezuz, skourjezet ha dismeganset, hep truez, gant tud gwisket kaer hag a deu ar c'houez vat diouto.... kristenien ha kriste-nezed hag o deus c'hoant da heulia ar c'hiz... hag a ya da bayaned!...

Ar yaouankiz a gresk war eur bez ha ne deu nerz ebet d'ezo.... hag ar vaouez vadezet ha « devot ». hep beza kristen tamm ebet, a goll he liou hag he nerz ouz sonerez eur zal-dans a zono ivez lezou he ene...

Siouaz ! an tiegez kristen, eienenn ar ga-rantez, ar vuhez hag ar peoc'h, a venn koue-za en e boull! Paourkaez Jezuz. Hen hag en deus savet Nazareth ; hen hag en deus dibra-

det ha savet ken uhel ar vaouez dre e vamm ar Werc'hez zinamm ; Hen hag en deus skuilhet e wad ha desket d'eomp beza tud henvel ouz tud oc'h ober ac'hanomp kriste-nien !

Paourkaez Jezuz, ar re o deus bet ar muia digantan eo a zo deuet da veza ar re zianaou-deka ; heuliet o deus kenteliou fall ar bed ; diskaret o deus e labour ; bestl ha gwin tren-ket a roont d'ezan da eva.... ha daoust da-ze, daoust d'an holl dorfejou-ze, e Galon hor gortoz hag hor ged bepred !

An ene karantezus — Va Doue, va holl vad ; buhez va buhez, va Doue, va Zal-ver ha va Roue, gant teneredigez ha glac'har e pokan da skourjezou ho pourrevien evit ho tigo'l eus ar poaniou ho peus bet da c'hou-zanv eus perz an dud hudur ha lorc'hus ; ho karout a ran, ar pezh ma c'heller ho karout, o Jezuz, rak c'houi eo va Jezuz !

Gant teneredigez ha glac'har e pokan d'an tachou o deus toulet ho treid hag ho taouarn evit gellout rapari dre-ze ar gwall-skoueriou

a ro eleiz a gristenien hep karantez, touellet gand eur bed dispac'her hag hudur.... ho karout a ran, ar pezh ma c'heller ho karout, o Jezuz, rak c'houi eo va Jezuz !

Gant teneredigez ha glac'har e pokañ d'ar Groaz, ho tron leun a wad ; diwarnan ho peus gwelet, p'edoc'h war ho tremenvan, ar pezh a dremen breman, en hon amzer, hag ez a enni pep tra, war well, a leverer, ha pa dalv, war ziskar eo ez eont ha n'eo ket souez, p'eo gwir eo kollet ar merc'hed gand o skanvadurezh hag ar wazed gand o lorc'hentez.

Diwar ho kroaz, e varnoc'h eun deiz tud ar bed, hag o c'hastiza a reoc'h, pa n'eo ket bet mad ganto digemeret ho lezenn a drugarez. Truez ! o va Lezenner ; truez ! o va Roue, truez ! o va Zalver Doue ! ho karout a ran ar pezh ma c'heller ho karout, o Jezuz, rak c'houi eo va Jezuz !

(Livirit pemp gwech, a greiz kalon: Ho karout a ran, etc.)

Eun dizro warnoc'h hoc'h unan.
— Grit eur sell war ho konsians... Daoust

ha n'ho peus ket bet sentet a-wechou ouz mouez toullus ar bed, ha klasket plijadurioù danjerus ha difennet.... Daoust hag al teorioù ho peus lennet, al lec'hioù-c'hoari ho peus bet darempredet, hag ar gizioù ho peus heuliet, a oa dereat atao ha didamall ? Ha direbec'h a-walc'h ec'h en em gavit war ar poenchou-ze ? Sonjit hizio dirak kadorvarn ho Parner, en deus truez ouzoc'h, hag a ginnig d'eoc'h ho pardon, gant m'ho pezo keuz d'ar pec'hejou ma 'z oc'h bet kouezet euno, ha ma poanioc'h d'en em viret da goueza enno en amzer da zont.... A-hent all, m'en em gavit eun dervez re ziwezat, e rankoc'h gouzanv e justis. P'eo gwir en deus milliget ar bed hag e lavarioù evel m'en deus p'eo gwir ar bed en deus e staget ouz ar groaz, an dud a zo kristen a galon hag a spered ne c'hellont ket, ha ne dleont ket karet ar bed ; n'eus eunan nemet lorc'hentez, skanvadurezh hag hudurnez, ha ne c'hell beza nemet fall, p'eo gwir e nac'h an Aviel hag al Lezenn gristen.

Grit aman eun akt a gontrision ker c'houek hag an hini a garfec'h ober war ho tremenvan.

A-spered, evel sant Yann lakit ho penn da harpa war Galon Jezuz ha selaouit e gomzou gant teneredigez hag e lavaro d'eoc'h ar peñz à ra d'e c'hlaç'har beza ker bras... hag ar peñz a c'hed diganeoc'h da laouenaat e Galon.

Jezuz oc'h en em erb-di ouz an ene. — Ene karantezus, n'emaout war an douar-man nemed evit karout.... Va c'har eta, a greiz da galon, a-greiz da ene, a greiz da spered ; laka an holl nerz a zo ennout d'am c'harout; da grouet em eus evit va c'harout, evit deski va c'harout war an douar-man, ha kenderc'hel d'am c'harout da virviken, goudeze, er baradoz.

Sitio! Sec'hed am eus kement a c'hoant am eus da veza karet gant Va Re, hag a nac'h rei d'in o c'halon... karet a reont kement tra a zo dleet d'ezo karet... o zud.... o mignoned.... o madoberourien.... o bro..... ranna a reont o c'harantez etre eleiz, ne ankounac'heont nemed unan: Me Doue ar Garantez....

Petra ' dlean ober c'hoaz ha n'em befe ket graet evid o chacha war ar Galon-ze he deus roet evid o fec'hejou berad diveza he gwad ?

Eun Doue hag a en em ro e-unan, daoust hag hen a c'hell rei muioc'h, zoken en e varadoz ?

Ha goude beza roet kement tra a c'helle rei, gwel petra roer d'ezan en dizro : yennienn, dianaoudegez, trubarderez. *Sitio!... Sitio!...* Sec'hed em eus, ya sec'hed bras da veza karet gant Va Re !....

O ! nag a gristenien laosk a zo, hag a gerz da heul kenteliou ha skoueriou falla ar bed, en o gizioù dizoare, en o c'hoarioù divalo, en o baleoù diskempenn, hag a deu evelse, dre o lorc'hentez hag o hudurnez da nevezi va Fasion penn-da-benn.... Ha c'hoaz, ene karantezus, hag a deurvez dont fenoz d'am frealzi, ma kavjen eleiz a galonou evel da hini, o c'harantez virvidik am digollfe eun tamm eus ar boan a ra d'in ar gristenien-ze ha n'int nec'het nemet gant eun dra : heulia kenteliou ar bed.

Sionaz ! nebeud a gristenien a gavan d'am frealzi.... n'eo ket ma vefe kement-se a fal-lagriez en holl galonou, met, skourn eo a zo enno ; kalonou int ha ne garont ket, hag an

dra-ze am glaz... N'hellan ket lavaret e vefe
o c'halonou d'in.... *N'am c'harer ket !*

Te, da vihana, skanva va foan ; lak da
ziweuz ha da Galon e gouli va c'hostez ha la-
var d'in am c'hares !

*Pokit da c'houli kalon Jezuz, gant kement a
deneredigez ma welo ervat Hor Zalver, e roit
d'ezan holl garantez ho kalon, ha livirit d'ezan
pemp gwech:*

« Karout a ran ar Garantez n'eo ket karet!
entanit ha peurzevit va c'halon, o va Jezuz!

Jezuz — Bennoz d'it ha trugarez ; vad a
res d'am C'halon. Bennoz d'it ha trugarez
terri a res va sec'hed.

Eun dervez, ma komzen, doaniet meurbet,
ouz Mac'harit-Mari, e lavaren d'ezi tostaat
alies ouz Sakramant an Aoter hag e teuje,
evelse, d'am dic'haoui eus ar re nebeud a ga-
rantez a ziskouez d'in eleiz a gristenien hag
abaoe, evelato, e weler muioc'hik a dud o
tostaat ouz an Daol Zantel.... N'eus ket a-
walc'h c'hoaz....

An oferenn hag ar gommunion eo burzu-
dou brasa va c'harantez ; Siouaz ! eleiz a dud
a glev an oferenn hag a dosta ouz ar gomu-
nion gant kalonou klouar ha setu aze perak
e ra ar burzudou estlammus-ze ken nebeut a
vad da gristenien a zo. Klevet an oferenn hep
karantez a zo eur merk anat ne ouezer ket
petra eo an oferenn. Kommunia heb eur gwir
garantez a zo forani bara an Aoter, p'eo gwir
ar bara-ze ne ra vad nemet d'ar re o deus
naon Doue.

Va c'harantez eo he deus kavet ha savet
sakramant an Aoter ; da garantez ar c'hristen
bremen eo lakat ar zakramant-ze da
dalvezout evid e vad e-unan hag evit va
gloar....

Bremen p'emaomp o komz hon daou, tal-
ouz-tal ha kalon-ouz-kalon, e weles peger
sklaer eo ar gwirioneziou-ze hag a zo tenval
d'ar re all, dre ma ne garont ket... Daoust ha
dilezet e vefe va aoteriou, evel ma vezont, ma
vefen karet.... Kaout a raer tud e pep lec'h,
zoken el lec'h ma werzer ha ma paeer ar
pec'hed, ha Me.... dilezet oun e Sakramant va
c'harantez, dre ma n'am c'harer ket....

Nag a vignoned a dosta ouzin hag am c'har, diouz eur gwel, met o c'halon a zo pell diouzin...

Mignoned hag am eus klasket.... hag i n'am c'hlasket ket.... Mignoned hag oun en em roet d'ezo hag i n'en em roont ket d'in... Mignoned hag a vez troet alies ouz o mignoned ha n'int ket troet tamm ebet ouz o Salver hag ouz o Roue.... Mignoned hag a en em ro, hep difizians ebet d'ar grouadurien... hag o deus aoun razoun ha difizians ac'hanoun.....

Mignoned hag a oar en em zieza hag en em ankounac'haat pa vez meneg da rei sikour d'unan bennak tost d'o c'halon, ha n'int ket evit kaout, gwech ebet, na nerz, na tro, da ober an distera vad evidon ; pa vez meneg ac'hanon o devez aoun atao da ober re !

Mignoned ha ne raint ket eun holl vad evit kreski va gloar.... Mignoned p'o devez ezomm eus va burzudou, met ehana a reont da veza va mignoned kerkent ha ma c'houlenenn diganto o amzer, o aluzen hag o foan.....

Mignoned ha mignonezed, a venn heulia ar gizio nevesa, hag a ra an neuz da dostaat ouzin evelato.... Met ken amzere eo o dilhad, ker skanv eo o fenn, ker brein eo o c'halon ma toullont bemdez dounoc'h douna an islonk a zo ouz o dispartia diouzin.

Darempredi a reont an iliz, p'ema c'hoaz ar c'hiz ; doare o deus da veza devot ; doare o deus ha netra ken.... rak en o c'halon n'eus nemed pec'hed.... Brao en diavaez, breinadurez en diabarz.... va adori ha va c'haret a reont, war o meno, met, n'eo ket evel ma fell d'ezo eo e fell d'in beza adoret ha karet...

N'em eus ezomm ebet anezo, war va zro.

Ar re a glaskan gwelet eo an dud hag am c'haro a greiz o c'halon ha nann hepken diwar beg o zeod... N'eo ket gant komzou goulo, kantikou ha bokedou eo e tostaer ouzin, pa glasker ober plijadur d'in, met gand eur galon ha n'eus pec'hed ebet enni !

Klask a ran tud d'am c'harout hag a geme-ro poan da ziskouez d'in o c'harantez.... klask a ran gwir vignoned ha nann tud hag a douezio traou ha n'int ket graet evit beza toueziet...

an renv hag ar fank... A raio eun naved d'ar red, en iliz hag a dremeno ar rest eus o amzer o tispenn o nesa hag o redek, a-gleiz hag a-zehou, war leton flour bali an ifern.

Ene karantezus, ro d'in da eva; sec'hed am eus; diskennet oun eus an nenv kement a c'hoant am oa da veza karet gand an dud... sec'hed em eus... ro d'in da garantez.

Siouaz! re alies kalon an den a zo henvel ouz eur puns dizec'het! Te, da vihanan, lavar d'in am c'hares a greiz kalon ha laka da holl nerz d'am c'hared, *Sittio!*

(Komzit goustat, ha lakit hoc'h holl galon en ho komzou).

An ene karantezus. — Ma n'ho peus bet, war lein menez Kalvar, nemet bestl ha gwin trenket, da zistana ho muzellou, pa c'houlennec'h eun dra bennak da eva, diganen-me, da vihana, o va Roue, ho pezo ar mel gwella hag an evach c'houeka a c'hellan kaout em c'halon baour da ginnig d'eoc'h. Selaouit aman ganen, o va Jezuz!...

Ho karout a ran, o karantez divent ha n'eo ket karet; ho karout a ran ha c'hoant am eus da lakaat ar re all d'ho karet pa 'z eus kement a dud ha n'ho karont ket hag a ra fae zoken war burzudou ho karantez, c'houi an Doue en em c'hraet den... Jezuz bugel, Jezuz den yaouank, Jezuz labourer, me hoc'h ador, e goueled va c'halon; gand a reoc'h, c'houezit er galonze tan ho karantez...

Me a fell d'in ho karet muioc'h eget n'oc'h bet karet biskoaz... roit d'in ho kalon hag ho karantez, rak sec'hed am eus, sec'hed am eus ac'hanoc'h! *Sittio!*

Karantez divent, c'houi ha n'oc'h ket karet, ho karout a ran... ho karout a ran e lec'h an dud-ze hag a stlap dismegans, dre o buhez a bec'hed, war ar garantez divent ho lakeas da vervel war ar groaz evit dasprena an dud... Jezuz stag ouz ar groaz, Jezuz o vervel, Jezuz sebeliet er bez, me hoc'h ador a-greiz va c'halon, met, gand a reoc'h, entanit ar galon-ze gant tan ar Garantez a zev hoc'h hini...

Me fell d'in ho karout evel ma n'oc'h ket bet karet biskoaz... Ya! roit d'in ho kalon hag ho



karantez, rak me ivez am eus sec'hed... sec'hed
am eus ac'hanoc'h! *Sitio!*

Ho karout a rankan, o karantez ha n'eo ket
karet, ho karout a rankan e lec'h an dud-ze
ken niverus ha n'eo ket anat e ouesfent pebez
tenzor a vuhez hag a garantez ho peus lezet
war an douar p'ho peus savet Sakramant an
Aoter, meulet ra vezo!...

Jezuz-Beleg, Jezuz-Hosti, Jezuz-war-an-Ao-
ter, me hoc'h ador a greiz va c'halon, met gand
a reoc'h, entanit ar galon-ze gant tan ar ga-
rantez a zev hoc'h hini... Me fell d'in ho ka-
rout evel ma n'oc'h ket bet karet biskoaz! Ya!
roït d'in ho kalon hag ho karantez... rak me
ivez am eus sec'hed... sec'hed am eus ac'ha-
noc'h... *Sitio!*

Ho karout a rankan, o karantez ha n'eo ket
karet, o tenna talvoudegez gwella ma c'hellin
eus an holl grasou a rooc'h d'in... o tec'het
diouz ar pec'hejou, n'eo ket hepken diouz ar
re vrasa, met, ivez diouz ar re vihana... fellout
a ra d'in en em zantelaat dre garantez evi-
doc'h...

Ho karout a rankan, o karantez ha n'eo ket
karet, em zi, etouez va zud, oc'h ober bemdez
ar pezh a zo em c'harg, hag o tougen, heb en
em glemm ar c'hroaziou a zegasoc'h d'in!...
fellout a ra d'in en em zantelaat dre garantez
evidoc'h!

Ho karout a rankan, o karantez ha n'eo ket
karet, o lakat an eneou a zo en dro d'in, an
eneou dianket hag ar bec'herien, d'ho karout
ha d'ho servicha... hag evid ober labour vad
wardro ar re a vev em serr, e fell d'in en em
zantelaat, dre garantez evidoc'h!

Ho karout a rankan, o karantez ha n'eo ket
karet, evit beza roet d'eomp an tenzor heb e
bar ma 'z eo kalon zinamm ho mamm ar
Werc'hez Vari. Ra gemerin skouer warni; ra
vezin evelti didroidell, glan hag izel a galon;
bleinet ganti ec'h en em zantelaïn dre garan-
tez; o kalon Jezuz, me 'garfe tremen va buhez
ouz ho meuli, c'houi, ar garantez ha n'eo ket
anavezet... me 'garfe tremen va buhez ouz ho
tigoll eus an dismegans a raer d'eoc'h bemdez;
c'houi ar garantez ha n'eo ket karet... C'houi
a lenn e plegou kuzeta ar galon; va anaout a

rit; c'houi a oar pep tra; c'houi a wel e goueled an eneoù ha daoust peger paour oun e ouezit, ervat, ne c'hoantaan nemet eun dra; beva ha mervel en eur lavaret hag en eur ziskouez d'eoc'h ho karan hag ho lakan dreist holl denzoriou an nenv hag an douar!

Pedenn da zigoll Kalon Jezuz savet gant Pi XI

O! va Jezuz, skuilhet ho peus war an dud madoberou diniver hag a ziskouez ho karantez divent, hag an dud dianaoudek n'o deus graet nemet ho tisprijout hag ho tilezel. Setu ni eta daoulinet dirak hoc'h aoter, gand an youl d'ho tic'haoui, dre an enor-man a reomp deoc'h, eus an dismegansou a raer deoc'h, a bep tu, hag a c'hlaz kement ho kalon garantezus.

Evelato, n'emaomp ket heb gouzout hon eus pec'het ivez, en amzer dremenet, ha gant glac'har eo e c'houlennomp ouzoc'h kaout truez ouzomp da genta. Dre ar pinijennou a raimp e raparimp an droug hon eus graet dre hor pec'hejou hon-unan, hag an droug a zo bet graet dre bec'hejou ar re a zo dianket diwar hent ar zilvidigez, ha ne vennont ket dizrei da vont d'hoc'h heul, c'houi, o fastor hag o mestr, hag a zo samm ho lezenn ker skanv da zougen, hag e troont kein deoc'h, o vresa dindan o zreid, evel ma reont, promesaou o badi-ziant.

Ni a garfe ober pinijenn evit kement all a bec'hejou bras a vez graet bemdez, hag ho tic'haoui vit pep hini anezo: dizurziou ar c'horf, dizurziou ar wiskamant, gwall-skoueriou gouest da vreina eneoù glan, disprijans ar zul, gwall-gomzou en hoc'h eneb hag a eneb ar Zent, dismegans e kenver ar Pab hag ar veleien, sakrilachou a-eneb Sakramant ho karantez, pec'hejou ar poblou a en em zav a-eneb galloud ha gwiriou hoc'h Iliz.

Karout a rafemp gwalc'hi gant hor gwad

kement-all a zismegansou skrijus. Evit ho ti-
c'haoui, da vihana, evel m'eo dleet, e kinni-
gomp d'eoc'h an digoll-ze ho peus kinniget
hoc'h-unan d'ho Tad war ar groaz, hag a gen-
dalc'hit da ginnig bemdez abaoe war an aoter;
kinnig a reomp d'eoche an digoll-ze a-unan
gant miritou ar Werc'hez ho Mamm, ar Zent
hag ar gristenien vat a zo c'hoaz war an douar.
Rei a reomp d'eoc'h hor ger e raparimp,
gwella ma c'hellimp, hor pec'hejou tremenet
ha re hon nesa, ar yenien a ziskouez an dud
dirak kemend all a garantez, dre feiz krenv
hor spered, dre furnez hor c'halon, dre hor
sentidigez ouz lezennou an Aviel, ha dreist-
holl ouz lezenn ar garantez. Poania a raimp
ivez, ni hen tou, da viret na vefec'h disme-
ganset ken kement, ha chacha a raimp d'hoc'h
heul ar muia ma c'hellimp a enecou.

Teurvezit digemeret, o Jezuz hegarat ha
madelezes, dre zaouarn ar Werc'hez Vari hag
a ra kement evit rapari drougou an dud, ar be-
denn a zigoll-man a reomp d'eoc'h aman.

Grit ma chomimp start betek ar maro war
an hent mat; grit ma varvimp en ho karantez
ha ma 'z aimp holl d'ar vro el lec'h m'emaoc'h

o ren gand an Tad hag ar Spered Santel, Doue,
eus an eil kantved d'egile.

Evelse bezet graet

*Kemerit ho kroaz etre ho taouarn hag a-raok
echui hoc'h eur adorasion pokit d'ar pemp
gouli, en eur lavaret, war bep hini, gant holl
feiz hoc'h ene, ar bedennig verr-man:*

« Ho karout a ran, Jezuz, rak c'houi a zo
Jezuz: Ho Rouantelez deuet d'eomp!

*Pokit da zourn dehou Hor Zalver evid an Es-
kibien, ar Veleien, ar Gloareged ha livirit :*

« Ho karout a ran, Jezuz, rak c'houi a zo Je-
zuz. Ho Rouantelez deuet d'eomp!

*Pokit da zourn kleiz Hor Zalver evidoc'h
hoc'h unan hag evit ho tud ha livirit :*

Ho karout a ran, Jezuz, rak c'houi a zo Je-
zuz. Ho Rouantelez deuet d'eomp!

Pokit da droad dehou Hor Zalver evit ma reno kentoc'h a-ze Kalon Jezuz war ar bed ha livirit :

« Ho karout a ran, Jezuz, rak c'houi a zo Jezuz. Ho Rouantelez deuet d'eomp.

Pokit da droad kleiz Hor Zalver ouz e bedi evid an dud dianket hag ar bec'herien ha livirit :

« Ho karout a ran Jezuz, rak c'houi a zo Jezuz. Ho Rouantelez deuet d'eomp !

An ene karantezus. — Hag o kimiada diouzoc'h, en noz-man, Roue ar Garantez, Kalon va Doue ha Doue va c'halon, ez an, gant fizians, dre ar gouli digoret gant va fec'hejou, en arc'h venniget ma 'z eo ho kalon, el lec'h m'eman holl deneridigez an Aotrou Doue... hag eno e choman hag e lavaran e fell d'in ho karet ha lakat ar re all d'ho karet war an douar-man, ma teuio Rouantelez ho karantez d'en em astenn eus an eil penn d'egile d'ar bed hag evel-se ec'h en em voazin, a-nebeudou, da gana, da virviken, er baradoz ho trugarez estlammus.

Evelse bezet graet.

**Pedenn evid en em vouestla da
Galon Zakr Jezuz
savet gant Leon XIII**

O Jezuz holl vadelezus, o Jezuz, Salver ar bed, taolit eur zell a drugarez warnomp-ni, stouet aman e-harz treid hoc'h aoter. Ni a zo hag a fell d'eomp beza d'eoc'h ; hogen evit ma c'hellimp en em starda muioc'h-mui ouzoc'h, e teuomp hizio, ac'hanomp hon-unan, d'en em vouestla d'ho Kalon Zakr.

Eun niver bras a dud n'o deus morse hoc'h anavazet ; kals re all o deus graet dismegans warnoc'h o terri ho kourc'hemennou : ho pezet truez ouz an eil rumm hag egile, o Jezuz dous ha mat, ha chachit-i etrezek ho kalon-Zakr. O Salver benniget, renit, nann hepen war ar gristenien vat n'o deus morse troet kein d'eoc'h, met ivez war ar vugale foran o deus ho tilezet. Grit d'ar re-man distrei buan da di o Zad, evit miret ne varfent gand an die-nez hag an naon.

Renit war an dud touellet gant menozioù

faos, pe ne fell ket d'ezo plega da zenti penn-da-benn ouz an Iliz. Degasit-i a-nevez war an hent mat, unanet er gwir feiz, evit ma ne vezo mui dizale nemed eur rummad denved hag eur pastor hepken.

Renit, ivez, war gement hini a zo c'hoaz, evel sebeliet e tenvalijen fals-kredennoù ar bayaned: plijet ganeoc'h o degas da sklerijenn ha da rouantelez Doue.

Sellit er fin, gant daoulagad a drugarez ouz bugale ar bobl-ze, a zo bet gwechall ho pobl dibabet ha muia karet ; ra gouezo ho kwad, bet gal'vet war o fennou, warno, evit beza o silvidigez hag o buhez.

O Jezuz, hor Mestr, diouallit hoc'h Iliz, roït d'ezi ar peoc'h hag ar frankiz. Roït d'an holl boblou ar peoc'h, en urz vat, ha grit ma vezo klevet, eus an eil penn d'egile d'ar bed, ar gomz-man : « Meuleudi d'ar Galon Zakr, he deus roet d'eomp ar zilvidigez ! d'ezi enor ha gloar da virviken !

Evelse bezet graet.

Livirit pemp gwech a-unan gand ar Pab :

KALON ZAKR JEZUZ.

HO ROUANTELEZ DEUET D'EOMP.

Sklerijenn war an doare da renka an Adorasion-noz er ger.

Daou rumm adoraturien a c'hell beza : adoraturien hag a zo meur a hini er memez ti hag adoraturien hag a zo o-unan en o zi.

1. — El lec'h ma 'z eus tud a-walc'h (o konta ar vistri, ar vugale hag ar zervicherien) e c'heller kaout, bep miz, eun nozveziad adorasion penn-da-benn, pep hini oc'h ober e eur, adalek 10 eur diouz an noz betek 5 eur diouz ar beure. A-walc'h eo e vefe seiz den en ti evid ober ke-ment-se.

2. — Eleiz a adoraturien all a zo hag a en em gavo o-unan da ober o eur adorasion dre ma n'o deus ket o zud tamm feiz ebet, pe dre ma n'eo ket, da vihana, ker birvidik o feiz hag o hini. O eur adorasion a denno bennoez an Aotrou Doue war o c'herent.

3. — Evit ma vezo gallet kaout, hep paouez, an Adorasion-noz en tiez, eo mat lezel ar beleg a zo e penn ar vreuriezh da rei e zervez hag e eur adorasion da bep adoratur. Pa c'hoanta an hini a laka e hano er Vreuriezh merka e-unan e zervez hag e eur, eo ret d'ezan heñ diskleria pa skriv d'ar beleg a zo e penn ar Vreuriezh.

4. — Ne brometter ket ober an eur adorasion dindan boan a bec'hed, met eun dra vat eo derc'hel d'ar ger, eur wech ma vez roet.

5. — Evit lakat an hano er Vreuriezh n'eus nemet eun dra da ober : skriva d'an *Tad Mateo*, 35, *Rue Picpus, Paris (XII)*. Eun daolennig sinet gant an Tad a roio da anaout, da gement hini a laka e hano er Vreuriezh, dervez hag eur e adorasion-noz er gêr.

6. — Eun dra vat eo ivez da beb adoratour nevez e bromesa bep bloaz dre eul lizer a gaso d'an Tad Mateo, da lavaret e talc'h start d'e c'her.

Rei a c'hello a-nevez e zervez hag e eur adorasion hag e adres penn-da-benn. En doare-ze e vezo gellet kas d'ezan, eur wech pe ziu, er bloaz, eur baperenn hag a ro aliou d'an adoratourien o deus moet o hano d'ar beleg a zo e penn ar vreuriezh.

INDULJANSOU

Setu aman an induljansou a c'hounezher oc'h ober an adorasion-noz er gêr :

1° *Eun induljans leun*, a bouez kovez, kom-

munia, ober eun dro en eun iliz pe en eun chapel ha pedi evit Hon Tad Santel ar Pab.

a) — En dervez ma jaker an hano e Breuriezh an Adorasion-noz er gêr.

b) — Bep wech ma raer an eur adorasion-noz, d'an eur merket.

2° *Eun induljans leun* all a c'hounezher, war an tremenvan goude kovez ha kommunia pa leverer hano Jezuz a c'henou pe a galon ha pa zigemerer, heb en em glemm, evel pinijenn ar pec'hed, ar maro a zegas Doue d'eomp

3° Eun induljans a 7 vloaz hag a 7 koraiz a vez gounezet bep eur adorasion a raer er tu all d'an hini merket.

